

L. J. C.

*
M. I.

MEULEUDI HA PEDEN DA ZANT FIACR

— * —
Ton : *Ni ho sahud, stereden vor.*

DISKAN :

Meulomp a greis kalon,
Meulomp hor zant Patron.

I

Gant tudchentil huel savet,
Fiacr, er Scoss a zo ganet ;
Lagad Doue, gant he vennos,
A bare varn'han deiz ha nos.

II

Dizale, sant Fiacr a voa
Eur bugel euz ar re goanta ;
Leun a furnez hag a spered,
Ha kristen mad ato bepred.

III

Renons a reas heb dale
D'an enoriou, d'ar vanite ;
Tremen 'reas he iaouankis
Oll da Jesus, oll d'an Ilis.

IV

'Vit servicha guelloc'h Doue
Ha beza d'Hezan nos ha de,
E kuiteas he vignonet,
He vadou hag he vro garet.

V

Renn 'reas eur vag vian
 Evit treuzi ar mor ledan,
 Da zont etrezec douar Frans
 D'ober eno he zemeurans.

VI

Kaout a reas eur lec'h distro
 Pa zigouezas e kichen Mau,
 Ha sant Fardy a lavare :
 « Va mignon ker, chom ganen-me ».

VII

Eur vuez pur hag angelik
 A gunduas eno pellik,
 He beden voa kuntinual
 He binijen dreist-ordinal.

VIII

Ne n'em gontantas ket ebken
 Da iun ha d'ober pinijen :
 Ar beorien a sikouras,
 Ha d'ar re glany vad a rentas.

IX

Nag a draou kaer ha burzudus
 A ra Fiacr abers Jesus !
 Ar bouzar 'glev, ann dall a vel,
 Ar pec'her paour a zeu santel !

X

Goude kement a vurzudou
 E voa hanveet e kals lec'hiou :
 Dont a ra tud euz douar Scoss
 Evit goulenn oll he vennos.

XI

Vardro neuze e voa choazet
 Da Roue en he vro garet,
 Ha tud ar Zant a zigassas
 Kals soudardet evit he glask.

XII

Neuze Fiacr, gant kals daëlou,
 E n'em adressas d'an Envou :
 « O va Zalver, o va Mam ger,
 Diouallit mad ho servicher. »

XIII

He beden n'oe ket achuet,
 Ma voa gant ar lornez goloet ;
 Ha sant Fiacr, gant eur joa vras,
 Oll da Jesus en em offras.

XIV

Gant ar c'hlenved e voa chenchet,
 Ken na voa mui anavezet ;
 Ha neuze 'voa lezet trankill
 En he goat bras hanvet Fordill.

XV

Raktal Fiacr en em gavas
 Dilivret euz he glenved bras ;
 Euz bar an Env, ar Vam santel
 En doa beillet var he bugel.

XVI

Goude buez ken burzudus,
 Fiacr a zo brema eürus
 Etouez ar Zent hag ann Elez,
 Gant kurunen ar zantelez.

XVII

Euz bar an Env, o sant Fiacr,
Sellit brema ouz tud Guengat,
O kana deoc'h meuleudiou
Gant ho c'halon hag ho moueziou.

XVIII

Beillit bepred, o Tad karet,
Var ar barrez 'zo deoc'h goestlet ;
Pellaït diout'hi ann dizursiou,
Dalc'hit feiz kre er c'halonou.

XIX

D'ar iaouankis roït ar furnez,
D'ar vugale sentidigez,
Ha d'ar gosni kalon nerzus
Evit mont var eûn da Jesus.

XX

O sant Patron, sellit ive
A druez euz ho pugale,
A gerz brema var ho roudou
Hag a c'houzanv bep seurt poaniou.

XXI

Gant alc'houez aour ho pedennou
Digorit deomp dor an Envou,
Ha ni gano deoc'h mill bennos
E kreis dudi ar Barados.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 24 Août 1903.

F. Corrigou, vic. gén.